

« Neventi gaer, marvad, a zo en Zant-Servez,
» Pa vrall ar c'hleier koz a-hed ar beurevez !
» Eur zul dreist ar re-all eo, hep mar, ar zul-man,
» Eur gouel ar re vrasan a ve lidet breman ? »

Hag holl dud ar barouz, o tont d'an ofern-bred,
O klevet ar c'hleier o son drantoc'h bepred,
An eil ouz egile a c'houlén, zouezet,
Ar pez a zo henoaz en o bro c'hoarvezet...

Klevet o deus bet c'hoaz mouez sklintin o c'hleier
O tiston en draouien, a-us d'ar prajeier ;
Mes n'o deus bet biskoaz he c'hlevet sederoc'h,
Na n'he c'hlevfont biken, ar pez a zo kaeroc'h !

Ha pegoulz. evit gwir, e plé an den gwelloc'h
Gant ar c'homzou skouerius en deus digant ar c'hloc'h ?
Badeziant a zo kaer ha pask-kentan ive :
Ne gavet ket kaeroc'h c'hoaz eun ofern-neve ?

Oh ! ar beleg yaouank, piou a glevo gantan,
Pa bign ouz an ôter evit ar wech kentan,
Ar mennoziou a zav en e greiz, den dister,
P'eman en e zaouarn korf Jezus, e Zalver ?

Ar beleg, ma zud kez, na pebez hano zakr !
Nag eo dleet d'an holl, zoken d'an dud fallakr ;
Hen karout, hen douja, rak hen eo « den Doue »,
Ha dre lec'h ma tremen e koue komzou bue.

Mar d'eo uhel e renk, e garg a zo pouner :
Hen a gendalc'h aman labour an Dasprener ;
En hano Hon Zalver, marvet war ar C'halvar,
Hen a zizam bec'hiou hag a zistan glac'har.

En e galon grouezus, kalon a bastor mad,
Kristen zentus, pec'her, a gav repu dalc'hamad ;
War skouer e Vestr karet, ar beleg n'ehan ket
Da glask, betek kavout, an danvad dianket.

Hen eo, en gwirione, ar Mignon, ar Pastor.
Ouz e welet, an dud a zigor frank o dor ;
Ar c'hristen evitan n'an eus netra guzet,
Gantan kalon boaniet a ve prim kennezet.

E vue penn-da-benn a zo d'an ineou,
Evit o zikour holl da zevel d'an Nenvou ;
Pa lid eun oferen, pa lavar eur beden,
Tud ar barouz a-bez o deus enné loden.

Ya, ar beleg yaouank, gant e ofern genta,
A dle karout Doue... Hag Hen meuli eta !
En-touez kement hag all, bezan bet kemeret,
Pebez enor d'e dud ha d'e barouz karet !

Eun enor braz d'e dud : rak eur mab beleget
A lak e dad, e vam da vezan binniget ;
Enor kalz d'e barouz, ive d'e genvroïz :
En douar mad hepken e tiwan ar gwiniz !

Arabad eo hen nac'h, evit barn eur barouz,
Ne dleer ket chilaou koz-komzou na koz-trouz ;
Eur barouz, m'hen tou d'ac'h, a zo mad, kristenien,
Mar ro, gwech ha gwech-all, d'an Iliz beleien !

Hogen, Zant-Serveziz, ennoc'h ra vezo stad !
Pevar veleg ho peus ; ho parrouz a zo mad :
Blanchard a Zant-Ijo ; Ar Gall, Leskouet-Gouarek ;
Angel ~~ho~~ ~~ar~~ ~~Barouez~~ betu c'houi tud barrek !

Avel fall, a dra zur, aboue meur a vlavez,
A c'houe warni, siouaz ! Mes, dre c'hras zant Servez,
Kement-se a dec'ho : galv eur beleg maro
A raio d'ar pec'her gouela ha dont en-dro...

hag ar ~~Barouez~~...

Ha c'houi, beleg yaouank, ganet war douar Breiz,
Ne lamp ket ho kalon evurus en ho kreiz ?
Ne gav ket d'ac'h penôz eman deut hon zent koz
D'ho pinniga hirie, da rei d'ac'h o bennoz ?

Lorc'h mat a zo ennoc'h o vezan diskibl d'ê :
Diwar o c'henteliou e trec'hfet eveltê ;
A-dreuz hon douarou, e kavfet o roudou,
Hag, o heuilh o skoueriou, e refet burzudou...

Mar d'eo kaer Breiz-Izel ha leun a zantelez,
Trugare d'hon zent koz evit o madelez ;
Gant hon Breiz o deus groet eur berlezen dispar.
Ha d'o foan e tleomp da chom ken digailhar !

Ne c'houlent ket gwelet dizober o labour,
Ha sed aze perak e roont d'imp zikour ;
Eur goulen eus o feurz hag e welomp kerkent
Ebestel o sevel, o kemer penn an hent...

C'houi ho peus o c'hlevet, ya, c'houi, abad Augel,
Abred e larjec'h d'ê, — ne oac'h nemed bugel :
« Klevet ran ac'hanoc'h... Dont a ret d'am gervel ?
« Me a zo d'ac'h, zent koz, ha d'ac'h betek mervel ! »

Ha setu c'houi beleg !... Ra blijo gant Doue
Skuilh warnoc'h e c'hrasou ha rei d'ac'h hir vue ;
Nag e kavet didrast poanial start evitan
En dachen a zo bet dibabet d'ac'h gantan !

Pa lavare gwechall : « Lezet ar vugale
« Da zonet davedon... Henvel int ouz êle ! »
E roe mil bennoz d'an neb o c'helennje,
Hag e strinke malloz gant neb o drouk-skouerje.

Ar gwall-skouer, er vro-man, a dle bezan mouget :
Ine ar bugelig n'hall ket bezan taget ;
Ar skoliou fall pelloc'h o deus groet o remzi,
Ar skol gristen hepken eo dleet renk d'ezi !

Hag e teuet neuze, o beleg kelenner,
Da voda en ho skol bugaligou tener.
Evit ambroug anê war hent ar wirjone
Ha miret ouz ar groaz...

Ar Fe n'hall ket bleunia hep diskamant kristen,
An Iliz n'hall ket pad hep skol fur d'he zouten ;
Gwallet eo ar bugel gant diskadurez fall,
Beleg, mestr-skol, zoudard, c'houi a deu d'hen diwall.

Ar beleg, en eur gir, eo mignon braz an-holl,
Ha netra, na kounar, na kasoni diroll,
Na harzo anezan, nan, d'ober e zever,
Da c'honid ineou prenet gant e Zalver !

Eur rum tud diskiant a ra brezel d'ezan,
A yud, evel diaoulien, pa welont anezan ;
Ha, koulskoude, pa deu devez ar maro yen,
An dud-ze, spouronnet, a glask ar veleien...

Karomp hon beleien, tud vad, en han Doue !
Rak, hep-ê, e vefemp henvel ouz loened goue.
Miromp d'hon Breiz-Izel he brud-vad diagent,
N'ankouaomp ket eo bet eur gwir « Vagerez zent ».

Hag evel-se, d'ar beo kenkoulz ha d'ar maro,
E welfomp eur beleg o tonet war hon zro :
Bevan a zo skany, skany, ha mervel skanvoc'h c'hoaz,
P'en deus groet ar beleg warnomp eur « Zin-ar-Groaz ! »

~~AR VEDDET.~~

Kerbernez, 30 Mard 1913.

la Veuzy